

A decorative border of Celtic knotwork surrounds the central text. The knotwork is a complex, repeating pattern of interlocking loops, typical of traditional Celtic art.

Breizh Brevez

Mikael MADEG :
Evel ma pardonom

N° 41 - 1981

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg

N° 41 - MIZ GENVER 1981

Rener : Andreo Merser

Sekretour : Jakez Salaun

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru Beaumar-
chais, 29200 BREST.

Priz an niverenn-mañ : 8 lur

Koumanant-bloaz :

- priz ordinal : 60 lur

- koumanant-skoazell : azaleg 80 lur

- studieren, soudarded : 40 lur

- broiou estrañjour : 80 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war eeun da : Brud Nevez, 6 ru Beaumar-
chais, 29200 BREST.

Ar chekennou-post a zo da veza laket war C.C.P. Brud Nevez 893-94 P Roazon.

I.S.S.N. : 0399-7014

Disklêriet hervez al lezenn : kenta trimiziad 1981.

C.P.P.A.P. : n° 34.627

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin, Le
Guilvinec).

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an aotre
d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e « Brud Nevez », n'emaint ket da
veza laket war gont ar kelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo
hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

TAOLENN

Golo gand Maya.	
- Libr eo Kim Dji Ha	2
- Ar garantez vil, bet dastumet gand Kerlann	3
- Gwreg ar chimino, bet dastumet gand Kerlann	7
- Mikael Madeg : Evel ma pardonom	10
- F.B. : Kazetennou a hirio... ha kazetennou koz.....	25
- Notenn	30
- Lizerou	30

LIBR EO KIM DJI HA

M'ho-peus soñj, eo on 38ved eo e roem da houzoud da lennerien « Brud Nevez » e oa bet kondaonet d'ar maro eur barz yaouank deuz bro Kore ar Hreisteiz : Kim Dji Ha. Hag eh embannem eur varzoneg diwar e bluenn : « ar vrud ».

Gand eun 40 a varzed euz a vro-Hall e oa bet savet eur homite ispisial evid goulenn ma ne vije ket sevenet ar zetañs ha ma vije laosket Kim Dji Ha da vond er-mêz euz ar prizon. En o zouez e oa skrivagnerien ken anavezet ha ken disheñvel hag Aragon, A. Bosquet, P. Emmanuel, Guillevic, G.E. Clancier, J. Rousselot, C. Roy, P. Seghers, J. Marcenac, hag all... Komiteou ha strolladou all a stourme ive evid ma vije bet dieubet Kim Dji Ha.

E miz kerzu diweza, pa oa c'hoaz on niverenn ziweza dindan ar wask, eo bet liberet a-benn ar fin, goude beza bet dalhet meur a viz en toull-bah. Laouen om o veza bet roet ar zikour a oa en or galloud rei evid ma vije doujet da wirlou mab-den barz an afer-ze, hag evid ma hellje beza klevet a-nevez mouez eur barz yaouank hag a fell dezañ bruda eur bobl hag he-deus c'hoant da veva en he sao.

AR GARANTEZ VIL

Me ho ped oll tud yaouank da zelaou eur chanson
Pell a zo em-oa laket barz em intañsion
Da gompozi eur reglenn, war sujed ma buhez
Prestet din hoh asistañs, m'ho ped war gement-se.

Me a oa eun den yaouank joauz ha dizoursi
'M-eus laket don em spered ivez em fantazi
Dond da ober eur vestrez ar vrava femelenn
A vije er pardonioù ha na blije da zen.

Rag gwechall pa oan yaouank me 'm-oa klevet lared
Eun den yaouank pa vo fur, pa 'h ay da glask merhed
Ne choazo ket ar re goant nag ar re gwell faro
Rag a-liez deuz o heul ve troiou divalo.

Anavezoud ran eun den a zo bet gwall-dapet
O veza bet kemeret eur plah koant da bried,
Rag hennez vije tromplet koulz en noz hag en deiz
Ar sort-se vid o zud deus ket a garantez.

Mez me rey intañsion pa 'on c'hoaz sur abred
Ne choazin ked eur plah koant evidon da bried,
Rag pa ne blijo da zen vo kuit d'he frekañti
Ha neuze 'mo esperañs vin ket tromplet ganti.

Me a ha d'ober eun dro evid goud ha me gavo
Ha derhel a rin da glask en toud ar pardonioù,
Ken n'am-mo kavet unan a vo d'am fantazi
Biken plah yaouank re goant ne deuan da henti.

Erru fin d'ar pardonioù, c'hoaz n'am-eus ket kavet,
Mez setu a-hont unan, a-greiz oan o lared
Harpet deuz mur ar vered vel eur plah sebezet
Laret vije eun maro, deuz ar vered savet.

He hoef oa war he bizaj vel eur plah koz kant vloaz,
Ha koulskoude me zo sur n'he-deus ket ugent vloaz,
Gand he zellou dizlontret diouzin pa zelle
An dud yaouank, oll gand fent, diouzom a c'hoarze.

Ma hredit gand gwirionez eur pennad e oan bet
Oh esa kaved an tu diouti da brezeg,
Dre ma welen den ebed o kôzeal ganti,
Me gemer hardiegezh vid mond d'he saludi.

« Salud, femelenn, charmant objed ma harantez,
Beza pe(fe) ar vadelez da bourmen ganen-me,
En-pad an abardaez ni on-daou gêzeo
Ha marteze vo moienn dim ober marhajo. »

Hag hi o lavared din gand muzellou troñset :
« Ne gredan ked, den yaouank, pe(fe) c'hoant da gaoud merhed,
Me a zo dister euz a gorv, ha dister a spered,
Ha n'em-eus tamm c'hoant ebed da blijoud d'ar baotred.

— « Kement deu d'ar pardonioù, koulz paotred vel merhed
Deu marhadourez gante, devêz c'hoant vent gwerzet.
Ho marhadourez deoh-c'hwi, zo vel hini ar re-ze,
Ha mar karit koñsañti, me o freno feteiz.

— « E-leal, mezi, den yaouank biken 'm-ije soñjet
Vijeh en em lakêt ken izel a spered,
Vid êsa dond da drompla eur plahig ken dister,
Rag biken n'hallan kredi diouzin pe(fe) afer.

— « Ganeh-c'hwi me 'mo afer ha nann gand merhed all,
Ya, mar karit koñsañti, me ah eyo gand mall
D'ho kondui bete'r gêr vid gweled mamm ha tad
Ha marteze digante me am-mo ma mennad.

— « Mar gouefen e vefe gwir ar pezh din peus laret,
Me 'h efe ganeoh d'ar gêr ha joauz ma spered,

Rag pell zo 'maint oh esa 'n em ziborer diouzin,
Po ked a boan d'o lakaad da zond da goñsañti.

Me a valee fier en-keñver ma mestrez,
Rag neuze c'hoaz n'ouien ked petra zinfie « mez »,
Me a erruas ganti ti he zad hag he mamm;
An ti oa teñval-braz, rag goulou ne oa tamm.

Me a roas daou wenneg evid kerhad goulou,
Vid m'halljem en em weled vid ober marhajo;
Evel ma oa deut goulou ha rentet sklerijenn
Me a oa bet tost braz din kaved eur falladenn.

Pa'm-oa gwelet an daou goz a beb tu d'al ludu,
Ar verh a lavaras de c'hweza an tan dioustu,
D'ober eur bannah soubenn hag eur bannah kafe,
E oa deut eun den yaouank d'he goulenn en noz-se.

He mamm a lavaras dei : « 'M-eus ket danvez soubenn,
Ha ma bara a zo just evid an estrañjourien;
M'az-peus digaset ganit eur strobell evelvoud
Hellez partial gantañ ha mond prim en ho roud.

« O ! ekskuzit ma gwreg vad, a lavaris dezi,
Me a zo deut gand ho merh vid he digas d'ho ti
Evid goulenn diganeoh mar be(fe) ho madelez
Ni ah ay kontant on-daou, barz ar briedelez.

Ar paotr koz a oa kontant vije grêt ar marhad,
Med ma ne oa divizet rankje kaoud boutailad.
« E-leh kaoud eur voutailad, c'hwi ho-po eur podad
Pa deuit d'akordi din en ho ti ma mennad. »

Neuze me roas arhant da gerhad ar hafe,
Hag eur podad gwin-ardant a oa kerhet ivez
Evid en em regali toud en kompagnunez;
Me, mar plij, oa azezet e-kichen ma mestrez.

Evel ma oan azezet me zantas eur c'hwez fall,
Ne ouien ket da betra galloud dond da damall;
Me gave din oa eul loen, en eun tu o vreina;
A-benn ar fin 'm-oa santet gand ma mestrez oa.

Kredit, ma mignoned ker, me 'm-oa mall da guitaad,
Rag me deuas ahane raog ma oa fin d'ar marhad,
'N eur lavared de kenavo vid an deiziou kenta
Rag me 'm-oa mall a-walh da helloud partial.

Pa oan deut en liberte, me oa rentet kontant;
Gwell e oa ganen-me koll ma fodad gwin-ardant
Vid beza ampoezonet gand eur sort loustoni;
Gwelloh ve ganen mervel vid biken dimezi.

Gwelloh vije din mil gwech beza bet eur plah koant,
Goude 'm-ije deuz he ferz da zoufr eun tamm tourmant,
Evid kaoued eur viltañs karget euz a c'hwez fall
Ne oa ket mad da dorchaboutou ar merhed all.

O ! me a oa eun diod, pa oan deut da gredi
Ar hoz gwrahed koz gwechall, pa oant e lared din
—« Diwall deuz ar merhed koant pa garjen dimezi,
An hini villa gavjen vije ar gwella din. »

Ne hon (1) ket ha me 'mo c'hoant da zimezi biken,
Mez ma teufe da zoñj din hellit kredi serten
Ne 'h in ked da glask ar villa vel 'm-eus grêt en dro-mañ,
Unan goant a rankin kaoud, pe chom evel bremañ.

Bet dastumet gand Kerlann.

(1) n'ouzon ket.

GWREG AR CHIMINO

E koadig Keralzig zo eur plah,
Vive la joie, la loriète !
Ya, honnez zo eur farodez,
Eviti da veza matez.

Er barroz oll ne weljet ket
Merhed yaouank brao, kempennet
Ma teuas paotred yaouank euz ar vro,
Evid ober dezi an dro.

Evid ober al lez...
Barz ar foariou, el leuriou nevez;
Mez int ne reent nemed goapaad,
Dizroet gand fae o daoulagad.

A-dre ma zi, paotrig ar zaout,
N'eo ket da seurt-te fell din kaoud.
Houlennan ket eun debrer yod
Eur mihieg, eur briz-diod.

Nag ivez eun turier douar,
N'on ket euz ar rumm-ze, c'hwi oar.
Koadig koant, me anavez ho tad,
Ivez ho mamm, kristenez vad.

A vev en poan, en paourentez,
O hleved a zo eun druez.
Setu dimezet Koadig koant
D'eun den a hounid kalz arhant.

Ar Gwenn 'deus ket eur chimino
A zo e ano Limouzino
Limouzino zo deuz a bell vro
N'eo ket ganet en Breiz Izel.

Vel eun aotrou ez eo gwisket,
Evel eur person ez eo desket.
C'hoaz ne gomz nemed ar galleg,
Fae a ra war ar brezoneg.

Na ma lavar paotred an Arvor :
Hennez avad zo eur pabor.
Karoud a ree kaer ar gwin,
Nag ar voutaill hag ar chopin.

Ez eo eur bambocher, me a gred;
Peurvuia ar re-ze vez gwelet.
Eiz deiz penn-da-benn eo padet !
Dañsou ha festou an eured.

Na ma lare an oll dud fur :
Kement-mañ avad zo dreist natur.
Allaz bremañ zo eun dañs all
Limouzino a zo eun den fall.

Ne ra nemed foeta arhant,
Pilad a-wechou Koadig koant,
Mez gwasoh c'hoaz an den diroll
Pa en-deus debret ha lonket oll.

Eun dervez eo bet diskampet
Ne oar den da beleh eo êt;
Allaz n'ez eus chomet netra
Arhant, na dillad, na bara.

Gand Koadig koant, nemed eur bugel,
Eur bugelig prest da heneh.
N'ez eus chomet vid oll vadou,
Med eun tog plouz hag eur hoz bragou.

Boutailloù ha daou gorn butun,
Gwreg paour, setu he oll fortun.

Merhed yaouank a Vreiz Izel,
An dud deut deuz ar broiou pell
A vez vel aotrounez gwisket
Chiminoed ha Gallaoued.

Diwallit mad oute, merhed,
Ha n'o hredit ket re abred.
Mez kemerit din eur Breizad,
Eul labourer, eur hristen mad.

Bet dastumet gand Kerlann.

SETU M'EMA 41^{ved} NIVERENN « BRUD
NEVEZ » ETRE HO TAOUARN.

EN EM GAUD A RAY AN 42^{ved} EN DEVEZIOU
DA ZOND, GAND EUN DESTENN DIWAR
BLUENN PER-JAKEZ HELIAS : « BUGALE
BERLOBI ».

WAR AR STERN EMA AN 43^{ved} HAG A VO
EVID EUL LOD MAD DIWAR-BENN BRO AR
HATALOËN.

DERHEL A RAIM IVE DA EMBANN AR
HANAOUENNOU BET DASTUMET GAND
KERLANN HAG ENVORENNOU L. CONQ, HA
KALZ A SKRIDOU ALL.

Setu, evid derhel da reseo « Brud Nevez », bezit
soñj d'adkoumananti kerkent hag echu ho
koumanant !

Klaskit ive koumananterien all da « Vrud
Nevez » !

3 goumanant evid priz 2, ma kavit da gouma-
nanti tud ha ne resevont ket « Brud Nevez »
c'hoaz !

EVEL MA PARDONOM

Unan euz danevellou al leor « PEMP TROAD AR MAOUT » gand Mikael MADEG an hini eo « EVEL MA PARDONOM ». Tri-zeg danevell a zo e-barz al leor, 436 pajenn en oll. 30 lur, ar mizou kas ouspenn, e vo gwerzet da goumananterien VRUD NEVEZ.

Pa oan pemp ploaz pe ze, e oa kroget ar hleñved ennon. Hag evid gwir, forz pegen koz an eñvorennoù em-eus euz va bugaleaj, n'en em welan ket morse o redeg pe o lampad, evel ma ree Jamari, va breur. Jalouz anezañ n'on ket bet morse. Evel-se e oa an traou ha ne vefe ket deuet din soñjal oa eun dichañs; n'eo ket eñ a vije bet paket, e-leh me. En e blas ne ouezan ket petra 'mije greet. Eñ da vihanna ne ree ket kalz a forz ganen, ha va lezel e peoh a ree. Bremañ eo eñ marvet, miz 'zo abaoe. Kavet beuzet en aod, sañset. Beuzet, sur, med moarvad eo en em veuzi en-eus greet. Ha me 'zo kaoz dezañ da ober. Evel m'eo eñ kaoz din da veza amañ en e blas, e prizon Roazon. C'hweh miz 'zo abaoe dija.

Ne ouezan dare petra eo ar hleñved-mañ, nemed da hou-zoud ne bado ket ouzin va buhez en tu all d'eun nebeud miz-vezioù. Va mamm a ouie ivez, rag klevet 'm-oa anezi o lavared da Vari-Saig, gwreg Saig an Ti all, an amezegez. Drol e kavan n'eo ket din he-dije lavaret, krak-ha-berr. Gand ar spi e varvjen war an taol diwar spouron.

Med ne ziskuliin netra. Ne chom ken din med eun nebeud mizvezioù. Ha n'eus leh ebed din da vond. Marvet eo va zad, lahet gand va breur. Hag en em veuzet hemañ. Sed ne chom ken va mamm er gêr. Doaniet e vezen e-pad pell o soñjal pegen rust edo hi ganen. Med a-benn ar fin, en em galedi em-oa desket ober ha ne reen ket forz ken. Hag amañ atao eo

goudor din, ha bevet e vezan. Bevet treudig med ne vez ket chipotet din ar pezh a vez lakeet din e va fiad. Ha n'eus forz penaoz on skuiz. Ha ne gomprenan ket re vad petra lavar ar re glañv all, setu e kavan gwelloc'h chom evel-se va-unan. O, galleg a-walh a ouzon, med hini tud ar vro-mañ am-bez c'hoari intent anezañ ha n'eus forz penaoz ne welan ket petra 'm-befe da lavared dezo kement-se. Ar peb brasa dioc'h ar brizonidi all a zo deuz kêr, pe neuze diwar ar mêz. Me 'zo euz an Arvor. Er mor n'on ket bet morse va-unan, rag kinglañv evel ma oan, n'oa ket tu din. Stroba va zad em-befe greet ha setu toud. Ha n'oa ket eun den da basiant kalz. Med dioc'h an Arvor on.

An istoriou aod a zo da chom en aod. Na ped gwech em-eus-me klevet ar re goz a-hont o lavared kement-mañ. Med petra ran-me forz euz an istoriou aod, pe euz an aod heh-unan. Ar mor a blijje din, da weled evel-se. Marteze edo ablamoù da doud ar baotred euz va farrez a zo bet beuzet e-barz. Euz kêr memez ez eus bet manket pemp dindan ugent vloaz. Ar re-ze a oa tud yah, euz ar re a ree goap ouzin-me. Krakig a reent ouzin, peotramant Luduenn. Med petra 'mefe greet nemed chom e-tal an tan. Brao din pa ne veze ket lahet gand va mamm, da veza heg ganen, rag en tiez all euz kêr e veze tan dalhmad en oaled. Ha koulskoude n'eus ket re a geuneud er vro. Euz an aod e teont peurliesañ, kerhet alese e-ser klask peñse diou pe deir gwech ar zizun, dreist-oll pa vez reverzi. Kerhet, kuzet ha lakeet da zeha ! 'Ouezan ket perag e vez kuzet, e gwirionez, rag eur ral eo e teufe maltouterien beteg Porz Bizinog. Da genta n'o-dije kavet netra, ha pa vefe, n'en-defe den lavaret dezo da biou e oa. N'o-devez ket re a vall kennebeud da vond 'trezeg eno rag gouzoud mad a reont eo unan euz kêr en-oa bet foltret ar Hi.

Hennez, ar hi den-ze, oa unan nevez deuet d'ar vro, fier dezañ gand al lañsou ruz war e vragou. Da betra oa deuet da glask afer ouz bizinerien an tu-mañ ivez ? Beva a rank an den e-pad ar bloaz ha n'eo ket hebken pa vez aotre da vond d'an aod gand al lezennou. Brao eo da re ar Rusi, tostoc'h diouz ar bourk, hag o-deus eun tamm douar dezo ouspenn : ind-i eo a ra al lezennou en ti-kêr, war zigarez int pinvidikoc'h. Esoh 'vez dezo med ni e Porz Bizinog a rank beva gand boued an dour zall.

Hennez, ar maltouter-ze, ar Hi e hano nemetañ e-touez an Arvoriz, oa deuet abred abred da vintin da spia war ar re a zastume ar bizin du a-raog goulou deiz hag a-raog deiz an dastum. Ha degouezet oa gand eun amezeg deom, a zo eun tamm kerent da va mamm. Lakeet anezañ da vond kuit, fierroc'h dezañ c'hoaz o kredi en-oa lakeet da dehoued unan euz paotred terrubi Porz Bizinog. Ha petra rafe gand an tolzennou berniet buan-ha-buan ? O has gantañ e-barz e hodelloù pe

war-bouez e voustachou reud orjal ? Freuza anezo oa komañ-set da ober.

N'eus ket bet gouezet morse piou 'n-oa greet an taol, med da vintin e oa kavet maro, faoutet e glopenn dezañ, mousta-chou hag all, gand eun taol krog.

Ha pa vefe bet Jefañ an Ti Nevez e-unan, he brasa enebour e kêr, n'he-dije ket va mamm flatet anezañ. Med petra ran-me euz an istoriou aod ? Maget on bet en aod hag e kleven anezo lavaret hag adlavaret en nozveziou goañv. Padal eo traou war an echu int. Etre va deg vloaz ha va ugent vloaz, ez eus eet kuit daouzeg den euz ar c'hweh-ugent pe ze a oa e Porz Bizinog pa oan ehanet da vond d'ar skol. Re yaouank an oll anezo. Ne gredent ket lavared, med daou anezo 'zo eet da valtouter o-unan. Sur int n'eus forz penaoz da nompaz beza hanvet du-hont, med ar re goz o-doa kavet abeg, êz eo da gompren. Mond da vartolod c'hoaz a zo eun dra n'eus ket da viroud outañ, med da valtouter a zo eun dismegañs ruz evid an Aocherien. Memestra e oant eet.

Beteg ar goañv paseet e yee mad an traou er gêr-mañ. Va zad ha Jamari a veze en aod. Va mamm a ree war-dro an ti hag a ree trouz din. Me a chome e-kichenn an tan da gempenn ar hevell pe oh ober linennou. Mond da bell ne oan ket 'vid ober, siwaz, mod all e vefen eet da glask reun beteg e Gwiseni peotramant donnoh er Menez. Med gand ar berr-alan e vefen bet paket buan. N'eus ken eur wech 'm-oa greet hag e vefen bet kannet propig gand al labourer-douar nemed ha gwelet en-oa on mahagnet. Trizeg vloaz e oan pe daouzeg, 'm-eus ket soñj.

Penaoz 'mefe ivez ? N'on ket er skol ken abaoe eur pennad dija, setu toud. D'ar poent-ze e vezen mezekaet c'hoaz ablamour Jamari, a zo bloaz yaouankoh evidon, a veze dija en aod gand va zad. A-raog ne oa ket tre heñvel rag er skol e tesken pez a garen. Se a blije din memez, ha beza lakeet dirag ar re all da azeza. 'Blamour da ze 'doa va mamm miret ouzin da vond d'ar skol ken. A-hed ar wech e oa hi sod gand va breur. Goude-ze, n'eus ket bet eet eun devez he-biou ha ne vefe red dezi, a gave dezi e ranke ober da vihanna, skandalad ahanon ha digas da zoñj din n'oan ken eun tamm koll boued ne dalveze ket pell e holhed. Pez a zo sod rag va golhed a oa hini Jamari ivez.

E-pad pell em-oa kavet diêz n'he-dije ket va mamm karet ahanon. Med tamm-ha-tamm oan deuet d'en em galetaad. Kredabl braz e rank beza inouet-maro bremañ abaoe m'on eet kuit euz ar gêr, kaset d'ar prizon diwar he gourhemennou dezi. Inouet pa ne chome den ebed ken dezi da skandalad. N'eo ket Mari Saig hag a laoskfe anezi da ober vil d'he

skouarn evel-se, rag ne welfe ket anezi ken o tond d'ober eur frapad kaoz diou pe deir gwech bemdez. Mari Saig a blije din-me kalz. Hi ne ree ket trouz din. Ha pa veze en on ti ne grede ket va mamm ober trouz din. Pe ne grede ket, pe ne deue ket da zoñj dezo ober, ken okupet ma veze o kaozeal.

Koulskoude n'oan ket re fall da gempenn ar hevell. Dond a ree an oll amezeien da zigas din o re-int da gempenn ivez. A-benn ar fin eo me a zrese an hanter euz ar hevell a oa e kêr, nebeud a dra en oll, rag n'eus ket hanter-kant kavell etre ar pemzeg pe c'hwezeg tiad tud a zo e Porz Bizinog. Med da vihanna n'oan ket kontet evel re zidavez memestra. Hag ober linennou a reen ivez, med war ar vicher-mañ n'oan ket ken ampart. Ar mor eo a zo kaoz ivez, ken diêz all ha gouez e vez-eñ, dirag an Aod Hlaz ha neuze etre ar Gazeg ha Karreg ar markiz. Forz pegen kaled e vefe greet ar skoulmou, e teuont da freuza memestra, pa n'eo ket ar reun o-unan a dorre evel just. An eil pe egile. Pa veze kollet eul linennad brizill, eo din-me e veze rebechet n'eus forz penaoz. Med pa veze eur frapad kalm, a-liez e veze digaset eur pesk bennag pe eur hrak da lakaad er zoubenn du-mañ ablamour da va labour. War va sklakig e ranken ober peb tra, avad. Ha pa ne veze ket an derzienn ganen evel just. Klevet 'm-oa en deiz all, damglevet kentoh, pa oa chomet digor dor ar zal, an ano a ree ar vedisined euz va hleñved-me. Eun ano hir, e galleg peotramant latin. Mad. 'M-eus ket dalhet soñj. Anfin, n'oan ket frealzet evid kelou-se, evel ar paotr koz a zo nevez marvet, eisteiz 'zo, a oa en eil gwele all, a-gleiz da va hini. Toniuz oa dezañ pa 'n-oa klevet ano e gheñved. Ma. Daou zevz goude oa-eñ maro.

Penaoz e vefen-me frealzet ivez, pa ne chom ganen 'med eur pennadig amzer da veva ? Med d'ober petra lakaad ar wirionez da veza anavezet ? Kredabl braz n'eo ket eul leh brao an ospital-mañ, ha tud gwall-vahagnet pe aflijet a vez gwelet e-barz, med... ! Petra 'ree din-me kaoud tevinier ha braventez war va zro pa n'oan ket 'vid ober netra ganto ? Ha kement ha mervel e kavan gweloh nompaz kaoud teod va mamm war-dro, da ober din hasta buannoh da vond d'an tu all.

E-pad bloaveziou em-oa klasket derhel penn dezi. Med beza respontet ganen ne ree nemed lakaad anezi da vond muioh-mui en egar. Na ped gwech he-deus bet lavaret din ar gerse a oa ganti nompaz beza laosket ahanon da vervel en dro genta ma oan bet klañvet, pa oan bihan-bihan, e-leh koll nerz he horv en eur chom dihun e-pad nozveziou, da zihuni ahanon pa ginnigen mouga.

A-benn ar fin e kavan trist eo va zad en-defe Jamari lahet ha n'eo ket va mamm. Med n'en-deus Jamari komprenet morse eo hi a zivize peb tra en ti, ha n'eo ket an tad an hini

oa. Ha n'oa diëzamant ebed etrezo, memez doare tud e oant, zoken, paotred dilavar, krefiv ha solud. Gouenn ar re ne vez dezo nemed eun dra a zaou da ober pa vez greet goap outo : beza mezeakaet divalo peotramant skei gand ar goapaer. A-benn ar fin, n'oa ken med daou deod en ti, va mamm ha me.

Eur wech 'm-oa klevet va mamm o vond da zod gand va zad, p'en-oa lavaret dezi e tennen-me dezi, eo dezi e oan-me mab muih evid dezañ. Distroñset edo he daoulagad gand ar gounnar ruz. Eur farsite sellad outi ma vefe dalhmad evel-se beteg fin he buhez. Da vihanna n'em-ije ket bet kemend-all a zieg o tond d'ar gêr gand soñj eur horvad c'hoarzin all, evel 'm-oa greet en devez-se ouz he gweled. Kanned oan bet ganti goude-ze, ha p'en-defe Jamari, ha va zad e-unan, c'hoarzet kement ha me. Med pa vefen re diwar melkoni da houde, a-liez e soñjen er gwel euz va mamm o klevad gand tad edon-me mab dezi muih evid dezañ. Diou pe deir gwech 'm-eus bet dihonet Jamari e-kreiz e gousk kenta en eur c'hoarzin ganen va-unan evel-se.

Va zad ne ree ket kalz a forz gand netra. Ha n'eus forz penaoz e veze ken tenn all e vuhez er mor, o roevad 'pad an deiz, o sacha war ar hevell, o troha bizin. Pa deue endro d'ar gêr e veze skuiz-divi-maro. Kia ree evel eun ejenn labour da veva ahanom, hag e tremene gand kregin kriz ha bara hag eur banne dour d'e lein, tra ma vezen-me e-tal an tan. Med morse n'em-eus klevet eur gomz heg gantañ evid kelou-ze. Rag evel-se emma kont e kement ti bihan 'zo toud, en Arvor. Penaoz e vefe bet dezañ soñjal e giz all ? Ha koulskoude e kase ar veleien da zutal prop ha kempenn pa deuent da gestal du-mañ. Paradoz, lvern, pe Burgator oa heñvel dezañ, rag re skuiz ' vefe da brofita anezo, am-oa klevet anezañ o lavared. Ar vamm, pa veze kaset an aotrou kure da bourmen evel-se, ar person oa eun den re otuz ha re nebeud e prize c'hwez ar moged soud a vez en tevinier evid dond da Borz Bizinog; hi neuze a yee d'ar presbital antronoz da rei prof d'an Iliz. Med ma vije bet lavaret dezi edo eur pehed kuzad war ano an neb en-oa lahet ar Hi, hag a anavezem mad-tre rag bemdez e welem anezañ, e vefe bet eur gwall-zouez dezi. Ha koulskoude n'oa ket eur plah da zouezi kalz. Ha dezi ober trouz hag en em chaoka diwar va houst, en em zibab propig a ree war-dro an ti ivez. Ha kaer he-doa chipotal din va boued, bevet mad e vezen ganti, gwelloc'h n'eus forz penaoz eged va breur er mor.

Jamari oa eur paotr diouz e dad, tavedekoh c'hoaz ma vije bet tu. A-raog ar goañv paseet, ma savas ar freuz en eur ober eur zizunvez pe ziou, ne gredan ket e vefe bet na skandal na sinkan etrezo, ha dezo paseal o buhez, beteg deg eurvez bemdez a-wechou, war eur hoz tamm kanod n'oa ket pemp metrad dezañ, an eil e-kichenn egile. Gwir eo veze fred a-walh

dezo, ha nebeud a zigarez da varvaillad, ken gand an avel, ken gand ar skuizder, ken dre m'eo an tad a zivize peb tra. Choazet gantañ al leh pesketa pe ar garregenn e leh vefe trohet bizin, ez eent en aod ha mad pell 'zo.

Beteg eur zulvez ma tistroas Jamari d'ar gêr, eur banne bihan gantañ en e fri, eur ral dezañ henn ober. Tra-walh da eilpenna anezañ e oa ha d'e lakaad da glask muih evid tri ger en e frazennou. Lavared a reas dezo en-oa lakeet en e zoñj dimezi gand Naig an Ti Nevez, e oa koz a-walh evid se, hag oa hi kontant d'e gaoud.

Pemzegteiz goude eo e savas etrezo ar sinkan-ze p'edont eet da vizina, pa oe lahet an tad gand Jamari.

Merh Jeñig an Ti Nevez eo Naig, eur plah n'he-deus ket triweh vloaz c'hoaz en devez hizio. Bet oa Jeñig eur hamalad da va zad, a vez greet Sant ar Hadiou, daoust m'eo Kêrmoal e hano famill, gand ar re all euz kêr. Med klasket en-oa Jeñig war-dro Mari Saig an Tevenn, va mamm-me, araozañ. Hag e lavar lod, se da vihanna 'm-eus klevet eur wech pe ziou, dre zegouez ha pa ne vezen ket gwelet, e oa greet o zoñj dimezi. Med galvet oa bet Jeñig da vond d'ober e goñje, e-pad tri bloavez bennag, hag oa degouezet va mamm da veza brazez. Lakaad skriva da Jeñig he-doa greet, heurta anezañ hag e dud dezañ, d'ober dezañ lakaad e ano da vond da vartolod evid mad. Med Jeñig n'oa ket bet respontet. Gwasa 'zo Sant ar Hadiou he-doa kavet da zimezi. Mar deo gwir an istor-mañ e vefen-me mab da Jeñig an Ti Nevez. Ha n'eo ket dibosubl rag en aod ne vez ket taolet evez kement-se oll ouz traou evel-se. Med n'eo ket drol ivez he-dije eur horvad kasoni ouzin-me hag he-dije paket eur reoriad imor fall o klevet Jamari o lavared en-oa soñj kaoud merh heh enebour da bried. Va zad ne reas van ebed neuze ha Jamari, a veze bemdez en aod ha n'eo ket e tro kêr pa ne chom nemed ar merhed hag ar re gabah, ne ouie netra euz an istoriou-ze. Hag eo ind-i o-daou a zo marvet, eur maro diezomm. Ha Mamm eo a zo kaoz euz o maro a-benn ar fin. Ha dizale ne chomo ken hi da gaoud on hano e Porz Bizinog. Med n'eo ket kalz a dra du-hont, e leh na vez morse anvet eun den dre e ano en ti-kêr, toujust ma oar anezañ e-unan pa 'n-eus tamm oad.

Da genta 'n-oa respontet netra. Eun tammig disfiziañs he-doa-hi, n'eus forz penaoz, rag klevet 'm-oa anezi ' lavared da Vari an Ti All e kave dipituz gweled he mab o koll amzer o rougouzed e tro an Ti Nevez, da zul, war an distro euz an overenn. Tra nemed se rag beb tro ma verze edon-me e-kichenn hag o selaou kement ger, e voustre war he c'hoant strewi ar brudou hag ez ee d'an ti all da ganderhel kaoz, e leh n'am-oa-me digarez ebed da vond. E-keit-se e vezen trankil da hweza êr er glaou beo ha d'ober eur horadenn vad, netra

nemed da helled ober eur zelled d'ar flammou.

An tad ne ree ket kalz a forz, em-eus lavaret dija, med hi avad a ree. Hag eo hi a zivize peb tra pa veze ano euz traou pouezuz. An dra nemetañ a emelle anezañ va zad dizañjer a oa ar politik. En eur ober e amzer vartolod en-oa dastumet menozioù radikal eun tu bennag ha n'oa sulvez ebed er bourk na zavje krozol ha gerioù braz etre peizanted hag eñ. Med evid peb tra all a zelle ouz ar familh, eo hi a ree al lezennou. Implij ar re a oa dija, gand sikour eun toullad krennlavariou he-doa desket dezi he mamm. Se 'm-eus klevet gand amezeien adarre rag en aod ne vev ket koz-koz an dud, ha va mamm-goz n'em-eus ket anavezet morse. Ker buan all ivez eh ijnfe eur frazenn rimet diouti heh-unan, pe e tizoñjfe lezennou an aod pa n'oant sikour ebed dezi. Eur spered lemm a vaouez eo bet hi evid ar wech. An tad a oa mestr en e vag hag ar vamm en he zi. Hi a oa e penn eun nebeudig arhanchou a oa er familh hag a zivize petra 'vefe greet ganto, miroud anezo evel-se, peurliesia.

Ken tommet e oa da Jamari, diwar eun hanter werennad rom, douetuz braz, rag muioh ne vefe ket bet evid prena ha ne vez ket lakeet die war gont an aocheerien en ostalerioù ar bourk, feiz, ken laouen edo an tamm outañ, posteg, war e vloaz warn-ugent hag e nerz yaouank treh dija meur a dro da hini Sant ar Hadiou. Setu ma ankounac'haas krak-ha-krenn goulenn digand e dud petra 'zoñjent.

Daou zevez goude, debret on zammig koan gand « gwa-zed » an ti, e lavaras va zad kement-mañ da Jamari, en eur zeri e gontell bleg :

« 'M-eus aon eo dibosubl dit dimezi Naig an Ti Nevez ».

Diwar yun edo Jamari, hag abaoe ar zul ne gredan ket oa bet meneget e gomzou dirag an oll. Med sklêr eo oa kenteliet va zad.

Amzer da Jamari kompren edo dezañ en-oa kaozeet an tad hag e responte, eet gouez an tamm outañ en eun tanflamm : « Perag an diaoul ? ».

An tad avad n'oa ket kenteliet hir a-walh da helloud respont da ze. Diblasa e voned gloan war e benn a reas, ha digeri ha serri e gontell diou pe deir gwech, ha neuze selled buan-ha-buan ouz Mari Saig an Tevenn, troet he hein outo, a oa oh astenn bodou kalkud a-uz d'an tan. Ne reas-hi van ebed. Dezañ e oa d'en em zibab. « Ablamour ema er mod-se ar jeu. Ne zimezi ket gand Naig an Ti Nevez ». War ze e savas hag er-mêz d'ober e gousk.

Jamari a oa krog ennañ eun imor sioul a oa da chom plantet

en e spered beteg maro an tad. Trei a reas daved ar vamm.

« Perag ne blij ket Naig an Ti Nevez dezañ ? »

Ar vamm ne zistroas ket d'ober he respont : « Dezañ eo da lavared ar pez a zo mad en ti-mañ, ha ma lavar n'eo ket reiz dit dimezi da honnez, neuze ne ri ket. »

« Med, perag ? »

« Er mod-se 'ma. Pa 'n-devez da dad lakeet eur zoñj en e benn ne ziskrog ket dioutañ. »

Me oa êz din gweled edo hi etre daou hoant. A-hed ar wech oa bet Jamari tost d'he halon ha sur a-walh e kave diêz ober displijadur dezañ. Diêz a-walh da vihanna evid nompaz kredi lakaad war he hont ar pez a oa bet, kredabl braz, divizet ganti heh-unan. Sur mad e ouie Sant ar Hadiou, pe e oa bet roet dezañ da gompren, n'oa ket dezañ e vab kosa. Med neuze, ne chome ket kalz hirroh d'en em zoñjal kennebeud war e vab gwir, ken heñvel outañ e peb tra. Kreñvoh kalz edo ar gasoni diwanet en on mamm diwar laoskentez he fitod kenta.

Evid ar wech kenta abaoe kuitaad ar skol e oa din kaoud truez ouz va breur. Er skol e vezen-me e-touez ar re genta hag e pake Jamari ar vuoh er porz ken a-liez ken en em glevem evid ma rofe anezi din a vare da vare, rag me oa gwelet mad gand ar skolaer.

An imor sioul a oa krog ennañ n'oa ket da zigriski. War wasaad ez eas an traou etre Sant ar Hadiou hag e vab. Tri devez war-lerh, en eur dremen dre gichenn an ti, e chome a-zav an Doubledie koz, tad Mari Saig an Ti all. Brao ha sioul oa an amzer, nebeud a houd gand ar pesked ivez rag kelou arnev a oa eun tamm. Bet oa an Doubledie o kregina da houde-lein hag e lavaras deom e oa eet ken pell ha Beg ar Gontell war e droad, gand an tre reverzi a oa, hag en-oa gwelet Sant hag e vab o linenna. Ha sinkan ha krog a oa etre an daou.

Er gêr da noz ne oe ger ebed. Na morse goude. Ha padal, bemdez, ez eent en aod. Med diwar-vremañ ne veze divizet netra, ken eur frazenn pe ziou, pe e veze kaset Jamari war Roh ar Honik da weled doare ar mor alese. Med diwar neuze ez eent heb ranna ger. Gwir eo n'oa ket ezomm rag an tad a zivize toud ha pelloh e ouie arvad Jamari petra oa e voazamantou hag e peleh e veze o pesketa diouz ma veze an amzer, pe neuze o vizina hervez ma oa ar mare bloaz. Pemzektez evel-se. Telr zizunvez.

Me n'em-eus kredenn ebed er sinadou, pe an traou-ze, med eur zadornvez da houde-lein e c'hoarvezas eun dra drol a-walh. Edom Mari Saig an Tevenn ha me, hi o tibab patatez ha me war-dro eur havell da Job an Touseg, pa oe klevet skei tri daol ouz an nor. Peadra da veza sebezet a oa. Da genta ne vez ket serret an nor en aod, nemed pa vez avelaj pe tourmant, ha neuze da noz evel just. Eur fourad avel 'doa serret anezi pemp munut a-raog ha n'oa eet hini ahanom da zigeri anezi endro. Eun digarez d'ar vamm da lavared din ober. Pell 'zo avad ne daolen evez ebed ken nemed ha kinnig a rafe skei ganen. Prenna eun nor ne vez ket greet ivez, rag an oll a anavez an oll diadou all. Pa 'z eus eun amezeg war an treuzou, e halv ano an ozah, pe ar wreg, hervez an eur, hag e teu e-barz an ti, heb chom da hedall beza respontet. Skei ouz eun nor n'eus nemed tud ar bourk a rafe peotramant diavêzidi.

Sebezet oam eta, ha selled an eil ouz an all : « Ya. Petra zo ? », emezon neuze. Respont ebed. Mond da weled. N'oa den. Nemed Mari Saig war doull he dor o tiskanta eur pesk. « C'hwi peus skoet, Mari ? ». « Skoet gand piou ? » emezi. « Gand an nor », eme Mamm a oa deuet da gichenn an nor heh-unan. « D'ober petra ' vefen eet da skei gand ho tor pa'z eus unan ouz va zi-me », eme Mari Saig a oa-hi troet a-walh da farsal ma n'oa ket Mari Sant ar Hadiou, va mamm.

Ar meurz goude, e tro ar memez eur, edon va-unan en ti, eet va mamm da cheñch tu d'ar pioka oa o seha. Ha war-lerh klevet trouz e voutou, mouez an Doubledie o hervel dirag an ti.

« N'ema ket va mamm en ti. E tevenn ar Roue ema. Med petra 'zo ? »

Dond a reas an Doubledie tre : « Te ' zo amañ, Krakig ? Da vamm n'ema ket er gêr ? »

« E tevenn ar Roue ema, lavaran dit, med petra 'zo o c'hoari pa peus defod gweled anezi evel-se ? Diveuzet eo Kêrlz peotramant debarket ar Zaozon ? »

« Ro peoh din, Krakig. Da dad pe da vreur a zo manket er mor. Ema ar vag o tostaad ouz aod ar Porz ha n'eus nemed eun den e-barz... E tevenn ar Roue ema da vamm ? Mond a rin da lavared dezi dond dioustu. »

Mamm ne gredas ket mond d'ar Porz hag eo d'an ti e teuas war-eeun. Kredi a-walh a ran he-doa divinet dija. Pellou e oa strafuill dre gêr dija. Atao 'vez dañjer pe eun dra dizordinal bennag. Moustra war he halon a reee, a gaven souezuz he-dije unan, a lavaren ennon-me, pa vezen troet d'ober

goap, ha n'oa netra am lakee d'henn ober nemed ar blanedenn o skei. Ar gwir em-eus d'henn ober a gredan o weled pegen didruez he-doa-hi skoet ganen azaleg bihan toud.

Jamari a deuas en ti. Dilavar. Hag a yeas da azeza e-tal an tan, paret e zellou war ar flammou. E toull an nor edo dija eun hanter dousenn euz an amezeien, lod euz ar merhed oa deuet kerdin ganto dija, e kenkaz.

Tenna e dreid euz e voutou-koad a reas hag o astenn d'o zomma. Atao ken dilavar. Med êz edo santoud n'edo an imor sioul ennañ ken med eun imor all, sioulloh kalz marteze, med n'oa enni liou kounnar ebed ken. N'oa ken sarah ar bleñchou en oaled. Evel-se e-pad eur munut. Daou vunut. Chuchumuchu moueziou a deue euz diavêz rag kenta tra he-doa greet Mamm o weled an amezeien war an treuzou a oe serri an nor dezo pe oe deuet Jamari tre.

« Peleh ema da dad ? »

Direspont e chome Jamari, paret atao e zaoulagad ouz an tan o lugerni gouestad hag o strakigella. Kasauz ar bleñchou pa n'int ken hanter-zeh.

« Peleh ema da dad, Jamari ? »

« Er mor ! »

« Petra ' zo c'hoarvezet ? »

« Marvet. » O selled piz outi e oan med etre liou teñval an ti, pa oa nevez serret an nor, hag arliviou ruz an tan, e oa diêz gweled. Chom a reas dilavar d'he zro, e-pad eur munut pe zaou, he daouarn harp an eil ouz egile atao, sko ouz he bruched dindan an divronn.

« E peleh ? »

« Roh ar Maze. »

Kerhet e oe korv Sant ar Hadiou. Kaset tud d'ar bourk da gas ar helou d'an ti-kêr ha d'ar presbital. Ar wazed a oa en douar d'an ampoent a yeas eur vagad pe ziou anezo da Roh ar Maze da weled ha kavet ' vefe ar horv. Amzer sin a oa, kompez ar mor eun drugar, eun amzer disheñvel evid an troha bizin. Harp ouz Roh ar Maze e oe kavet korv Sant ar Hadiou, e benn en dour, e gein oh ober evel eur hrant houarn pa vez divoret a-greiz e gousk. Amzer dezo digas ar horv hag e oa deuet d'ar gêr eur vagad all, paotred bet o vizina. Klevet o-doa p'edo ar roud avel o kas an trouz war an tu-ze, cholori

moueziou arajet o taola dismegañs da bevar horn ar mor; setu gerioù a lavaras Jeromig Boned Gwenn d'ar re all a oa diredet da gleved.

Pa oe digaset korv Sant ar Hadiou en e di e oa eur pezh troh e kreiz e dal o paka bete kreh e gloenn, d'an oll da weled. Da heul ar horv oa deuet gand ar wazed gwiltin ar vag, a oa en dour ivez.

Feñch ar Meksik, kosa den Porz Bizinog, bet e brezelioù Napoleon en Amerik, a lavaras, pa oa bodet an oll dud en oad evid ar veill en on ti : « Ar herreg a zo lemm o begou e Roh ar Maze. »

Antronoz vintin e oe digaset ar arched gand mab unan euz kilvizienn ar bourk.

Med da houde-lein pa'z eas tud Porz Bizinog d'an iliz e leh ma oa an interamant da veza, e oa daou archer deuet euz Lezneven. Ar re-mañ a roas urz da zigeri an arched. Deuet oa ganto eun den kravatenn, dillad giz kêr gantañ, ha n'oa anavezet gand den ebed er vro. Divennet ober an interamant en devez-se, med an devez war-lerh e vefe greet. Tud Porz Bizinog o-doa c'hoant e chomfe unan bennag anezo da ober an adveill med ar person a lavaras da genta ne oa ket ezomm, ha da houde nah e vefe greet.

Ar gwener da vintin e teue aotrou mêt ar bourk da Borz Bizinog. Gantañ e oa daou archer hag eun den all euz kêr ha n'eo ket an hini oa bet gwelet devez an interamant cheñchet. Goulenn a rejont ti Alexandre Kërmoal digand Fin Goz. Homañ, daoust ma ouie brezoneg euz ar vro unan euz an daou archer ivez, ne oe ket 'vid lavared dezo. Bouzarec edo eun tamm, emezi, ha ne grede ket beza kleved an ano-mañ e Porz Bizinog, ha dezi anaoud an oll dud euz kêr rag bete pemp pe c'hweh vloaz zo eo hi a ree ar vicher amiegezh evid an aoherien, diplomet euz Skol al Louarn evel a lavare heh-unan. Paneved eh anaveze ar mêt doare an aod eun tammig gwelloc'h eged aotrounez kêr, e vefent c'hoaz o trei en tevenn, ha me e Porz Bizinog o tresa kevell. Eur homersant eo ar mêt, eun den a-feson, hervez kleved, med unan euz paotred ar Gorre n'eus forz penaoz. Kredabl braz eo mab ar halvez en-oa diskuillet an doare. N'eus ket da fizioud e korv an dud-ze euz ar bourk, tostoh o halon hag o spered ouz paotred o hravatennoù eged ouz truillerien ar hostez.

Eun den a-feson an aotrou mêt memestra, med chom a ree da nehî heb kredi displega d'ar vamm petra oa kaoz dezañ beza deuet euz keid all. Ma rankas an archer a ouie brezoneg

lavared e oa disfiziñs ez oa bet muntret Alexandre Kërmoal ha n'eo ket koueza war e benn en dour : « Drol e vefe bet d'eun den a zo pase tregont vloaz 'zo, ma n'eo ket daou-ugent, war an dour a-liesoh evid en e wele, beza tumpet diwar e vag en eur frapad kalm, memestra ». Ar vamm a respontas dizeblant e oa bet gwelet traou drolloh c'hoaz er horn mor a zo etre ar Gazeg ha Porz Bizinog dioc'h eun tu, ha neuze da vond bete Karreg an Tan, a-hont toud en tu all.

Mond difonn a reas an enklask endro. An aotrou Kravaten, ano moused kêr evid an oll aotrounez, ne ouie ket a vrezoneg, hag evid doare edo dleet eh intentfe rag troet e veze dezañ beb eil frazenn a veze lavaret. Troet hirroc'h eged ne oad bet o tislepa e brezoneg, a-liez.

Jamari a oa er mor, rag beva a rank an dud, hag evid se en em veva. Ma kav tud 'zo o bevañs o vond da guriuzenni war ar re all, n'ema ket kont evel-se en aod. Med kerhet e oe memestra. Ha kerhet ivez ar willotin. An eil war-lerh egile e oe aterset pennoù famill kêr, ken gwazed, ken merhed, e leh oa intañvezed. Den ebed n'en-oa gwelet netra. An hini nemetañ a lakeas eun astenn d'e respont a oe Feñch ar Meksik, a gomze evid an oll en doare-ze : « Amañ ne vez ket amzer da chom da spia an eil re war ar re all. Beva a zo kaled, ha labourad a zo red d'an oll, braz ha bihan, 'pad an deiz. »

War-lerh se, o hedal e vefe distroet Jamari, e chomas an aotrounez da gaozeal etrezo. Paotr e gravatenn a oa sur e oa bet drouglahet va zad, tra ma responte outañ ar mêt hag an archer oa euz ar vro ne deufent ket a-benn da houzaout an doare ganeom, e oam ken aheurtet ha... Med 'm-oa ket gelllet kompren toud rag kaozeal etrezo a reent.

War ze e teuas unan da lavared e oa kavet Jamari, med ne oa ket evid dond dioustu, ahann na vefe noz, rag re a linennou en-oa er mor, hag oa kistion amzer fall. An oll a gompren n'eo ket c'hoant dond. Ha droug en aotrou gallez diwar goust ar respont-mañ, a gave rog ha divergont en e gefñver. Med eur wech troet deom soñj an aotrou, e respontas unan euz ar re oa bet o klask Jamari en eur astenn dezañ eur roeñv. Goulennet oe outañ hag oh ober foultr gand an den edo. Farsuz a-walh e oe kavet rag Jeromig Boned Gwenn eo en-oa greet ar jestr-mañ, hag abaoe maro e vamm, pemp ploaz 'zo, n'eus ket Jeromig distaget eur c'hoarz na zoken eur gomz re. Feñch ar Meksik a lavaras d'an aotrou, e galleg, pezh a chome anezañ abaoe e amzer zoudard, n'en-oa an aotrou nemed mond da lavared e-unan da Jamari, a oa o sevel e linennou e-kichen Toull al Letern a-hont. N'eo netra drol e chomfe da zavel linennou, emezañ. Daoust hag an aotrou a laoskfe eur pred lipouz, tomm war e daol, da vond eun tu bennag da weled eun den n'anaveze ket ablamour oa

lavaret en-oa hennez c'hoant gweled anezañ ?

Ha brasoh c'hoaz droug en aotrou med d'an ampoent e oa bodet dirag on zi pase daou-ugent euz tud Porz Bizinog, setu, me gred en-oa eun tamm aon e savje kabaill. En em guzulia a rejont hag e houlenas an aotrou piou a vefe o vizina asamblez gand va zad. Ar m'êr e-unan a respontas edo e vab edo kredabl braz.

An abardaez a oa, ha diougan glao. Lakaad a reas an aotrou kemenn deom e teufe endro antronoz vintin da zeg eur ha lavared da Jamari chom en douar, ha ma ne rafe ket e hellfe chom er mor beteg fin e vuhez rag kenta tro ma teufe d'an aod e vefe arestet gand an archerien. Med pelloh e ouie an oll e vefe kaset ganto n'eus forz penaoz, pa ne ve ken ablamour d'an dale ha d'an displijadur greet d'an aotrounezse. Ar pez oe kavet drol eo e vefe red lavared eun eur avad. Piou, mad a-walh, a lavarfe da Jamari e vefe deg eur anezi ?

En noz-mañ ez eas Mamm da weled Feñch ar Meksik ha daou pe dri all euz tud kosa kêr. Pa zistroas e tihumas Jamari, ha me. Lakaad ahanom da zond e-kichenn an tan, e leh m'edo kroaz ar zalver a-uz da dal-benn an oaled, hag eno mond en on daoulin, evel p'edo o teski deom on fedennou pa oam bihan. Ha goulenn ouzom lavared eur bedenn evid anaon va zad.

Hag eno e lavaras deom ar pez oa divizet. N'eo ket divizet « ganti », rag savet oa a-du re goz ar gêriadenn edo an dra vad da ober. Pe da vihanna n'oa nemed se. Me a 'z afe d'ar prizon ha Jamari a chomfe rag paneved kaoud eur gwaz da vond en aod evidom on-daou, ne vefe ket va mamm ha me evid beva evel-se, ken paour m'edo ar gêriadenn dija. Ha Mari Saig an Tevenn a oa re goz evid addimezi, ha dreist-oll n'oa gwaz ebed en heh oad a vefe paotr-yaouank-koz peotramant intañv.

Petra 'm-oa soñjet da genta o kleved eun dra ken direiz ? Soñjal e hellfen tehoud euz ar vro med se en-dije diskouezet muioc'h c'hoaz d'an aotrounez eo me em-oa lahet va zad. Chomet oan pell-pell o klask kompren mad a-walh petra oa o c'hoari. Jamari e va hichenn a oa dihunet ivez. Eñ zoken ne gouskas banne ebed en nozvez-mañ. Eur wech, o kleved anezañ o tenna pounner ha dizingal war e alan, e savas ennon ar c'hoant gouzoud.

« Jamari ».

« Ya. Petra 'zo ? »

« N'out ket kousket ? »

« Kredabl nann ».

« Lavar din, Jamari, te peus lahet an tad ? »

« Ya. »

« Perag ? »

« Ne felle ket dezañ e timezfen gand Naig an Ti Nevez. »

Goude-ze ez eas eur pennadig soñjal he-biou.

« Ne gredan ket e helli dimezi ganti kennebeud pa vin eet kuit », emezon. Ha war ze, en em rei da gousked kaloneg, me da vihanna rag eñ oa da chom digousk.

Antronoz vintin pa deuas an archerien, o-unan-penn gand urz da gas Jamari ganto, da Lesneven, ar vamm a lavaras dezo n'eo ket Jamari a oa en aod gand va zad d'ar poent-ze, med me. Pa oa goulennet ouz ar re all ha gwir e oa, e oe respontet ya gand an oll. Ha setu-me kaset ganto. Me ha n'oa ket bet morse gouest da zibrada gwillotin va zad. N'on ket sur e oant sod a-walh da gredi ahanom, med tud kêr a rafe, douetuz-braz. Ha neuze ne veze roet dezo nemed ar respont-mañ.

C'hweh miz 'zo dija emañ amañ e prizon Roazon ha miz 'zo abaoe m'eo marvet va breur. Gouzoud a reen e oa marvet a-raog ma vefe kaset ar helou din. Gand an derzienn e oan d'ar poent-ze ha dre va huñvreou em-oa gwelet anezañ o veuzi, daoust na ouien ket petra oa kaoz dezañ da ober. E-pad ar hleñved-ze eo ivez em-oa kleved daou glañvdiour, unan o lavared d'egile ne chomfen ket tri miz all c'hoaz da glañvi. Bremañ on deuet war va zu adarre, med barrekaad 'm-eus ket greet ha ne rin morse, hag abaoe deg devez dija emañ o skriva va zammig istor, da ziverra va amzer kentoh, rag ne ran forz ebed ken a-benn ar fin. Amañ ez eus liñselioù, ha pa vefent louz eun tamm ha melenet, tra n'oa nemed golhedou er gêr.

N'ouzon ket perag eo en em veuzet Jamari. Marteze he-deus bet Naig an Ti Nevez troat kein outañ, ha n'eo ket drol rag kuzad war an dud ne zinifi ket e vez ankounac'haet o zorfet. Laosket 'vez an torfetour da veva e-touez ar re all med a-nebeudou e vez lezet ennañ e-unan. Pe neuze e vefe savet sinkan etre Mamm hag eñ diwar-goust Naig. Pe neuze oa deuet a-benn ar fin da gompren eo hi a enebe outañ da zimezi

hag oa savet morhed dezañ o veza lahet an tad.

Lavaret vez en aod e teu ar re veuzet da hervel ar re a zo da veuzi. Unan all euz treuzkredennoù on zud-koz eo homañ pa 'n-eus eun den lahet eun all ne gav ket ken diëz ober adarre. Mod ma anavezan va breur, ha dezañ beza eun den dilavar eh anavezan anezañ mad, e kredan ez oa deuet en e spered tamm-ha-tamm ar c'hoant laha or mamm. Med se ne vefe ket bet pardonet dezañ, ha ne vefen ket bet er gêr da zamma e behed en e blas. Marteze ivez eo ar morhed beza lezet ahanon da vond en e blas hag a zo kaoz dezañ d'en em zistruja. Ne ouezan ket ha ne ouezin biken, an nebeud amzer a chom ganen da veva n'eus forz penaoz, rag pa welan anezañ dre greiz va hufvrou noz, hag a-wechou en deiz, eo o veuzi ema ha n'eo ket gweled e zoñjou a ran. Ne ouezan ket zoken hag e Porz Bizinog ema on mamm atao. Med war eur poent da vihanna e ouezan edo ar gwir ganti : An istoriou aod a zo da chom en aod. Evel-se bezet greet.

Mikael MADEG.

EVID OBER SKOL

- **Seite-Stephan** : Nouveau lexique breton-français et français-breton (adembannadur kresket) 27 F.
- **A. Merser** : Ar brezoneg evid bugale 5-6 vloaz. (Ar Helenner, n° 22) 10 F.
- **J. Le Du, Y. Le Berre** : Textes choisis dans « Dihunamb » (2 levrenn, Studi n° 15 ha 16) 30 F.
- **Y. G. Morvan** : Textes choisis dans « Feiz ha Breiz » (Studi n° 11) 15 F.
- **M. Oiry** : Textes choisis dans le « Courrier du Finistère » (Studi n°s 17-18) 36 F.

Da veza goulennet digand
BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29200 BREST
Konta 15 % ouspenn evid ar mizou-kas.

KAZETENNOU A HIRIO...

Euz o hazetenn o-devez ezomm an dud, evel kazimant euz o bara pemdezieg, hag evelse ema kont dreist-oll abaoe ma kavas Emil a Girardin an tu, er hantved all, da voulla kazetennoù marhad mad. N'eo ket souezuz e vije neuze 20 milion a lennerien-kazetennoù e bro-Hall en deiz a hirio, daoust ma n'eo ket se kemend-all, marteze... Piou avad a oar penaoz e vez savet ar hazetennoù ? Ral eur wech ma soñj al lennerien er re a vezont bet skrivet ha moulet ganto, nemed pa vez kavet tra pe dra da damall dezo.

Gwir eo ive n'o-deus ket bet klasket bepred ar gazetennerien rei da houzoud penaoz e vez greet eur gazetenn. Setu ma kavo gras an dud o weled unan anezo, Maurice Grassin, o tiskuilla en eul leor (1) pehini eo e vuhez, petra eo e vicher ha pere eo e brederiou.

Ma 'z eo iskiz an titr, an eil-titr, dindan, a ziskouez gwelloc'h petra e-neus c'hoanteet M. Grassin displega en e leor. A-dra-zur na n'eo ket heñvel labour ar hazetenn a vez o redeg ar bed war gont kazetennoù 'zo euz Pariz, hag hini an den a zo o labourad en eur gêr vihan bennag, hag a vez o skriva en eur gazetenn euz ar seurt ah anavezom arañ e Breiz hag er rannvroioù all, hag he-deus da renta kont euz an oll zarvoudou en em gavet pe d'en em gaoud war e dachenn. Gand se, ma 'z eus unan bennag hag a zo paset mad evid gweled penaoz e vever en eur hornad douar bennag, eo ar hazetenn an hini eo moarvad. Setu perag, sur a-walh, eh a muioc'h-mui an istorianed hag ar glaskerien all da bennaoui er hazetennoù.

Med distroom evid ar poent d'ar hazetennoù a hirio. Daoust hag eun den libr eo ar hazetenn ? Daoust ha didu eo ? Daoust ha ne vez morse krennet war e gomzou ? Sed aze goulennou hag a reer outañ aliez. E respont a ro Maurice Grassin en e leor : eun den yennet an hini eo. Yennet gand ar Prefed hag an dud e karg, gand ar pennoù braz hag ar pennoù bihan, gand an oll re a vez oh ober war-dro kevredigeziou ha strolladoù a beb seurt. Paket etre ar sindikajoù hag

ar batroned, etre an tu kleiz hag an tu dehou. Tapet etre e lennerien ha renerien ar gazetenn, etre boazamanchou an eil re hag ar re all, hag ar c'hoant o-dije lod da gaoud « traou all » en o hazetenn.

Dre ze, n'eo ket hebken kinnig ar heleier eo a ra ar hazetenner, n'eo ket hebken rei an oll geleier-ze hag a vez « e servij an oll » ha n'hell ket eur vro tremen hebto (henn gweled mad eo bet, pa 'z eus bet eur grêv meur a zizunvez en eur gazetenn euz ar Hreisteiz), c'hoant e-nevez ive muioh-mui da « glask » ar heleier, da vond da vale war zouarou difraost c'hoaz, a-wechou zoken da « zihuni » e lennerien.

Poulzet eo da vond war-raog n'eus forz penaoz, pa wel kemend-all a chenchamanchou o c'hoarvezoud endro dezañ : ar hêriou o kreski, an dud o chench micher, oh en em lakad da veska, n'eus nemed soñjal en oll gomiteou-divenn a zo bet savet koulz e kêr ha war ar mêz... Med an dud, dreist-oll an dud e karg, ne blij ket dezo beza re hijet, ha buan e vo tamallet ar hazetenner. Dond a ray unan kerkent da glemm dre ma ne gav ket ken en e journal ar pez a gave enni araog, hag unan all ken buan all da rebech dezañ politikad adaleg ma vo bet direnket...

Gweled a-walh a reer da nebeuta, zoken ma ne ver ket a-du gantañ war beb poent, e-neus M. Grassin bet bevet ar pez e-neus skrivet. Hag evid gwir, eur vicher da vrevi an den eo a-wechou hini ar hazetenner, p'e-nevez eur ebed d'echui, betek 800 linenn (25 pajenn !) da skriva en eun devez, en eur respont d'an taoliou-telefon, reseo al lizerou-kemenn, digemer an dud, mond euz eun eil tu d'egile...

Ha c'hwero eo ive eun tamm bennag, evel m'e-nije bet kollet ar « feiz ». Nehet hag ankeniet a-walh ouspenn-ze, o weled ne chench ket gwall-vuan ar feson da skriva ar hazetennou, pa h eo bet chenchet an doareou-moulla, ha dreist-oll o weled teknikou all, e-giz an informatik, o tond da zigas boulerz adarre er hazetennou...

Tan a zo c'hoaz e Maurice Grassin, daoust da ze, ha ne zebiant ket beza prest da zilezel an dachenn-emgann. Ar pez a garje nemedken eo gelloud labourad gwelloc'h, beza frankoh war e labour, beza niverusoh d'ober al labour. Med ouspenn ma ne vez ket prest bepred ar re a zo perhenn d'eur gazetenn da gleved seurt klemmou, daoust ha pell a-walh eo eh a e hetou da V. Grassin ?

Da nebeuta, ema e leor da veza lennet, a gav din, gand kement hini a garje kompren penaoz e vez skrivet ar hazetennou, ha gand an oll re o-deus war zigarez pe zigarez da zarempredi kazetennerien. Ne vo ket amzer gollet dezo.

... HA KAZETENNOU KOZ

Lavared a reen eo deuet ar hazetennou da veza eun danvez-studi evid a beb seurt klaskerien. Evid skolidi ha studierien e hell beza ive, hag ema Yann an Du hag Ifig ar Berr o proui an dra-ze war dachenn ar brezoneg.

Henn gouzoud a reer, ne vez ket moulet, evid lared, a gazetennou en or yez, na re pemdezieg na re sizunieq, tra ken med kelaouennou o tond er-mêr eur wech ar miz pe beb eil miz... En deiz a hirio, ar gazetenn vrezoneg nemeti, a-benn ar fin, a zo unan dre gomz, hag eo keleier pemdezieg ar radio an hini eo.

N'eo ket bet kont evelse dalhmad, hag e 1865 dreist-oll eo bet kroget Eskopti Kemper da embann sur gazetenn sizunieq e brezoneg penn-da-benn, hag a badas 19 vloaz kazimant. Euz « Feiz ha Breiz » koz an hini emañ o komz. Goude ze e vo embannet c'hoaz berniou gazetennou all, e brezoneg penn-da-benn, pe a vo warno mui pe vui a vrezoneg. War-lerh ar brezel diweza eo e paouezas peurlvuia ar hazetennou sizunieq da voulla brezoneg da vad.

Muioh a ze a dalvoudegez o-deus neuze ar pevar a leoriou a zo bet laket da zond er-mêz dindan talbenn « Studi », hag a zo pep hini anezo diwar-benn hini pe hini euz kazetennou brezoneg pouezuz an amzer dremenet : « Feiz ha Breiz » (2), « Dihunamb » (3) ha « Le Courrier du Finistère » (4).

N'ema ket al levrenn genta diwar « Feiz ha Breiz » e gwirio-vez, med kentoh diwar-benn an den, Y.G. Morvan, hag a skrivas e-barz evid ar muia. Beteg-vremañ na n'eo ket anavezet ar Morvan-mañ gand ar re a zo troet war al lennegezh vrezoneg, eme Yann an Du hag Ifig ar Berr gand rêzon. Eñ evelkent eo a zavas, a droas pe a gempennas e brezoneg Leon ar peb brasa euz ar pennadou a oe moulet e « Feiz ha Breiz » euz 1865 da 1875. Ken mad e ouie skriva ma kav da Yann an Du ha d'Ifig ar Berr e tenn e skridou d'ar re a ginniger hirio d'ar yaouankiz, nemed evel just ar « henteliou » a skwer vad a veze bewech o kloza anezo, hag a vo kavet diamzeret bremañ gand kazimant an oll. Rag eur mirour striz eo a oa Yves-Goulven Morvan, nemed e ouie gwelloc'h evid den all ebed lakad eur gelennadurez da dremen en e vojennou. Ha gand plijadur, gwir eo, e vez lennet eun istor evel hini « Kolibri » c'hoaz. 19 pennad all eo a zo adembannet amañ, war-lerh eur studiadenn brisiuz diwar-benn buhez hag oberou Y.G. Morvan, e skritur hag e vrezoneg.

An diou levrenn diwar-benn « Dihunamb » n'emaint ket kennebeud diwar-benn ar gelaouenn en ha fez. N'o-deus

Yann an Du hag lfig ar Berr dibabet a bennadou nemed war an 10 vloaz kenta euz eur gazetenn a dlee padoud euz 1905 da 1944, heb an disterra ehan, nemed e-pad ar brezel kenta.

E bro-Wened an hini veze embannet « Dihunamb », dindan renerez Loeiz Herrieu, med tri all a dud eo a oa asamblez gantañ evid diazeza ar gazetenn : M. Jegouzo, P. ar Goff hag A. Mellac. Savet e oa bet gand harp an liz hag a oa d'an ampoent o vrezeli gand ar Stad, da vare lezennou 1901 ha 1904. Ne oa ket L. Herrieu hag e gamaraded o klask legadi mestr-oberennou a lennegez d'o diskennidi, soñjal a reent kentoh pourchas danvez lenn bourruz d'ar beizanted.

Re vuan marteze e vez displeget gand Yann an Du hag lfig ar Berr eveziadennou talvouduz diwar-benn buhez ha spere « Dihunamb », hag a vije bet mad astenn pelloh ar gaoz warno : personelez Loeiz Herrieu, roll ar merhed a genlaboure d'ar gazetenn, pezh a oa modern ha nevez enni er penn kenta, perag e teuas niver al lennerien da ziskenn etre an diou vrezel, hag all...

Med eun dra bennag all a gaver el leoriou-mañ eo eur studiadenn diwar-benn brezoneg Gwened : en eun tregont pajennad bennag nemedken hag eun toullad kartennou ouspenn, eo displeget pezh a rank kement brezoneger gouzoud da nebeuta diwar-benn rannyez Gwened.

Evid kinnig eun dibab a bennadou tennet euz ar « Hourrier » na n'eo ket Michel Oiry en em gemeret evel an Du hag ar Berr. Daou leor eo a ginnig ar re-mañ, diwar-benn « Dihunamb », ar studiadenn (e galleg) en hini kenta, ar pennad, gand eur geriadur ouspenn, en eil (5). Michel Oiry n'e-neus savet en nemed eur studiadenn berr-tre (brezoneg ha galleg keñver ha keñver), re verr ive pa zoñjer eo bet padet ar gazetenn euz 1880 da 1944.

Tro e-neus bet memestra da verka e oa ar « Hourrier » eur gazetenn « legitimist » er penn kenta, hag e teuas evel an darn vrasa euz ar Gatoliked d'en em zisklêria leal e-keñver ar Republik, da houde. Med etre an liz hag ar gouarnamant e trenkas ar zoubenn araog pell, abalamour d'ar « Frañsouned », sañset.

Lakad a ra ive Michel Oiry ahanom d'ober anaoudegez gand ar « hazetenner touet » a oa euz Korantin an Nours. Sed aze c'hoaz eur « skrivagner » brezoneg ha n'eo anavezet gand kazimant den ebed en deiz a hirio - n'eus nemed teir linenn e traoñ eur bajenn diwar e benn en « Istor al lennegez » Abeozen - hag e-neus koulskoude bet skrivet brezoneg beb sizun e-pad eur hart-kantved, a oa gouest « da zispaka e zoñj war gement tra a vez red kaozeal en eur gazetenn », hag

a oa dindan e bluenn « eur yez pinvidig ha blazet mad, nerzuz ». Na pa vefe nemed evid Korantin an Nours e ranker lenn 17ved niverenn « Studi » diwar-benn ar « Hourrier » (6). Bez e tle eun eil niverenn a bennadou dond er-mêz war-lerh an hini genta-mañ.

*
*
*

Y.G. Morvan, K. an Nours - ha L. Herrieu en eur stumm all - sed aze tud hag a dalvez ar boan beza « addizoloet » hirio, zoken ma 'z eo bet « kozet » ar mennoziou a zisplegent. Ema istor ar hazetennou brezoneg da veza skrivet c'hoaz. Er bloaveziou tremenet, n'eus bet embannet nemed pennad diwar « Arvor » (7), hag eur studiadenn e galleg gand F. Elegoet diwar-benn bloaveziou kenta « Feiz ha Breiz » nevez (8).

Eun tamm sklêrijenn all a zigas bremañ leoriou « Studi », daoust ma h int bet prientet da veza implijet kentoh er henteliou brezoneg. Gand al labouriou all a zo en hent, e teum tamm ha tamm moarvad da anaoud gwelloc'h hag en eun daore « skiantel » kement a zo bet embannet e brezoneg e kazetennou an amzer dremenet.

F.B.

- (1) Maurice Grassin : Qu'on m'envoie un journaliste pour croquer la rosière : chronique d'un localier. Le Signor, 1980.
- (2) Yves-Goulven Morvan : Textes choisis dans Feiz ha Breiz, présentés par J. Le Dû et Y. Le Berre. Studi n° 11.
- (3) J. Le Dû, Y. Le Berre : Textes vannetais choisis dans « Dihunamb ». Avec une présentation historique et linguistique, et un lexique. Studi n° 15-16.
- (4) Michel Oiry : Textes choisis dans le Courrier du Finistère. Studi n° 17. Embannet e vez « Studi » gand ar CRDP, 92 rue d'Antrain, e Roazon. Koumanant de 4 niverenn : 70 lur. Bez' e hell al leoriou beza prenet a-hiniennou digand Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, e Brest.
- (5) Rimou, bruderez, sorbiennou, ha skridou o tenna d'al labour-douar eo a gaver en dibab.
- (6) N'eus taolenn ebed euz ar pennad dibabet e fin al leor. Ar re genta a zo pennadou dihortoz a vruderez e brezoneg. Souezuz ive ar pennad gand K. an Nours diwar-benn ar brezoneg er skol, ma tispleg ennañ... e brezoneg evel just, eo eun dra vad divenn ouz ar vugale komz brezoneg er skol da redia anezo da zeski galleg. Pennadou all a zo diwar-benn an dornerezed dre dan, stad an devezourien ha Louise Michel...
- (7) Bet embannet gand « Hor Yezh ».
- (8) F. Elegoet : Feiz ha Breiz 1900-1914. Pluriel n° 18.

NOTENN

E diweza niverenn « Brud Nevez », on-eus embannet eur varzoneg diwar bluenn or heneil ha kenlabourer Per-Mari Mevel : « ar vlenierez ». En eun doare digomprenuz a-walh avad, eo bet eilpennet ar pevar poz kenta hag ar pevar diweza.

Goulenn a reom neuze digand ol lennerien adlenn ar varzoneg en eur grogi gand ar pevar boz diweza. Hag e pedom P.-M. Mevel d'on digarezi evid ar fazi-moulla-ze.

LIZEROU

• O paouez reseo niverenn 39 Brud Nevez emañ. Lenn a ran « Merhedou Lokenole » bet dastumet gand Kerlann. N'ouzon ket pegoulz na peleh eo bet dastumet. Pa zigoran leor « Kanaouennou Breiz-Vihan », 186 pajenn, gand H. Laterre ha F. Gourvil, bet moulet e Moulerez ar Bobl er bloavezh 1911, (moarvad e oa yaouank c'hoaz Kerlann), e welan pajenn 136 : « Merc'hejou Lokenole » kanet gand Per Jaouen euz Lokenole.

Heñvel-tre eo ouz hini Kerlann. En eil poz eo moulet : Merc'hejou Lokenole a ia d'ar baludenn.

Er seizved : Ar merc'hed a respontaz deuz a draon an iliz.

Trizegved poz : Hag a bede mil malloz war ar vartoloded.

C'hwezegved : Ha peb a walenn arhant d'ho kamaradazed.

Kenta warn-ugent : Lablond a zo partlet hag aet er-mêz ar vro / Ha merhed Lokenole a hortoz e zistro.

Setu aze eun nebeud evezriadennou am-eus greet. •

P. Roy, Roszon.

• Da heul va adkoumanant da Vrud Nevez, e kasan deoh va gwella betou evid 1981 ha kalz a vloaveziou en tu-hont. Bloavezh mad deoh, ha da Vrud Nevez, ha d'an oll genskriverien. Dispar eo « Traon Bouzar » L. Conq. Brao-tre ar peziou-c'hoari ha pennadoù H. Gaudart. •

Anjela Duval.

• Kendalhit gand ar gelaouenn. Ken plijuz eo da lenn. •

M.C., Logivi-Plougraz.

• Tremen poent eo din kas deoh gwerz va houmanant nevez. Ma vijen bet pinvidikoh, em-ije prenet ar henta listennad leoriou diganeoh, hag ar houmanant ouspenn. Med ne hellan ket ober bremañ. Kas a ran deoh 100 lur eta, evid an eil listennad. Kontit va houmanant en eil listennad-se. Ouspenn e profan eur houmanant d'ho kelaouenn d'eur mignon din. Dre vraz e plij din danvez ar gelaouenn. •

J.-Y. B., Roszon.

Embannadurioù Emgleo Breiz

NEVEZ ADVOULLET

Jakez RIOU

Geotenn ar Werhez

ha

Barzonegou

« Eur pezh-barzoniezh e nao boz-kan »

P. J. HELIAS

Eur brao a zigarez da lenn pe da adlenn Jakez Riou.

Priz al leor : 34 lur. E gwerz e ti « Brud Nevez ».

PRENIT EVID 100 LUR !

Kenta listennad

- Danevellou euz an amzer-vremañ
(nevez deuet er-mêz) 24 lur
- J. Riou : Geotenn ar Werhez ha Barzonegou
(embannadur nevez) 34 lur
- Morvan : Pennadou tennet euz Feiz ha Breiz .. 15 lur
- P.-J. Helias : Tan ha ludu 15 lur
- E. ar Barzig : Buhez ha Faltazi (eil leor) 18 lur

An oll leoriou-mañ evid 100 lur
(e-leh 106 lur hag ar mizou-kas).

Eil listennad

- Koumanant da Vrud Nevez evid eur bloavez ... 60 lur
- M. Oiry : Pennadou euz
« Le Courrier du Finistère » 18 lur
- Danevellou euz an amzer-vremañ
(nevez deuet er-mêz) 24 lur
- Fiselezed Groñvel (Kan ha diskan) 30 lur
(leor ha minikasedenn)

Kement-mañ evid 100 lur
(e-leh 120 lur hag ar mizou-kas)

Brud Nevez, 6 ru Beaumarchais, 29200 BREST
C.C.P. Brud Nevez 893-94 P Roazon

**NEVEZ DEUET ER-MÉZ
EUL LEOR NEVEZ GAND BRUD NEVEZ :**

**DANEVELLOU
EUZ AN AMZER - VREMAN**

GAND

**J. Abasq, Remi Derrien, Charlez ar Gall,
P.-M. Mevel, My Skaouidig,
Korantin Riou, Per Trepos**

Le lecteur trouvera un écho des événements qui, depuis trente cinq ans, ont marqué notre région. Écrite dans une langue simple, celle de tous les jours, mais avec des sensibilités différentes, et des réminiscences dialectales très visibles mais ne constituant nullement un obstacle à la compréhension, ces sept nouvelles devraient avoir la faveur du public bretonnant.

Ouest-France.

Le risque d'un tel ouvrage pourrait être une certaine hétérogénéité. Il n'en est rien. Ces nouvelles sont en prise directe sur l'actualité bretonne. Elles sont toutes empreintes d'émotion, de sensibilité, et tous ces auteurs savent manier admirablement la langue bretonne. De véritables morceaux choisis qu'on relira souvent. Pour son plaisir et son enrichissement.

*Roger Laouenan,
Le Télégramme.*

**Priz al leor : 24 lur
Brud Nevez, 6 ru Beaumarchais, 29200 Brest
C.C.P. 893-94 P Roazon**